

AVEL HON LENNEGEZH O C’HWEZHAN (21)

« Emaomp o vont da c’houlenñ kalz digant hon lennerien. Evit ar brezhoneg eo, hag evit Breizh. Labourioù a-bouez hon eus da voulañ, labourioù a-bep seurt, hag i re hir da vezañ moulet war *Walarn*. *Gwalarn* a rank chom ur gelaouenn, enni pennadoù berr a-walc’h, ha disheñvel. Al labourioù hir a c’hellfe bezañ embannet e stumm levrioù, gwir eo. Darn, avat, a vefe prenet mat. Darn a vefe prenet nebeut, hag i marteze ar re bouezusañ e-keñver an amzer dazont. Diskoulmet hon eus ar gudenn evel-henn : Sevel a reomp, e-kichen *Gwalarn*, ur gelc’hgelaouenn graet a-ratozh da voulañ al labourioù hir, un oberenn e pep niverenn. *Sterenn* eo hec’h anv. Miziek eo. E miz Genver e teu er-maez. Al labourioù kentañ da vezañ moulet a zo : *Imram*, gant Maodez Glanndour. *Ar grilheta e Breizh*, gant Farnachanavan. *Strilhouezh*, gant G. B. Kerverzhioù. *Makbezh*, troet diouzh Shakespeare gant Roparz Hemon. Uhel a-walc’h e rank bezañ priz ar c’houmanant : 100 lur ar bloaz, da vezañ kaset d’an hevelep chomlec’h ha koumanant *Gwalarn*. »

Sed a voe kemenn krouidigezh *Sterenn* ur c’hoar da *Walarn* e Kerzu 1940. Lañs a oa gant an embann brezhoneg. Ur gelaouenn, an hini istorel, gant ar pennadoù berroc’h da ginnig liesseurted d’al lennerien, ur gelaouenn nevez o kinnig ur studiadenñ dre niverenn. Ur studiadenñ pe un oberenn. Tan bras dindan gaoter al lennegezh kement ha mont hebioù an darvoudoù drastus, diaes, hebioù ar vuhez eilpennet. Al lennegezh evel un hent da zerc’hel, da zerc’hel mort betek penn ar veaj, penn ar merdeñ. Ha dre zegouezh eo ma lenner *Imram* evel niverenn gentañ *Sterenn* ? Maodez Glanndour : dimeziñ ma n’eo ket eurediñ ar varzhoniezh hag ar speredelezh. Ar relijion, ne lavarfen ket. Beleg, sur, harpet war bazh kizellet, sakr ha bleuniet an hengoun, den a fez, ur fez deuet da verkañ kement kroashent en hon bro, den gredus ha dibleg (me ’oar !) o terc’hel divrall diouzh ar barradoù... Met pebezh barzh, a-raok pep tra... Pebezh barzh...

« Douar milliget, ur Ramz a zo roue warnout,
Ar Roñfl hudur, loudour,
Gourvezet teurek en e vougev, goude regorfad
War bern eskern an dud en deus debret.
Hag e-pad ma roc’h o mestr, e ra fest ar razhed. »

« O liorzh, o porzh.
Setu m’az kwelan dindan va selled
Ez kened, douar muiañ karet ar Varzhed.
Me az salud e-kreiz da vrud
Bro Shelley, Grae velegan,
Enez ar skañvder, enez an dieubiñ,
Lec’h annez da spered an dudi.

Douar, menez, plantet gant mil gwez heneuziet,
Bro venniget ar Voudiged,
’Lec’h ma ruilh stêrioù glas war reier gwenn-perlez.

Piv a c’hello kanañ, Boudiged glan,
Skañvderioù evn ho korfoù gwevn
A ’n em vrañsell gant al laboused drev,
Azezet war skourroù ar gwez ;

Ho furmioù mistr a hoal davedoc'h heiezed ar c'hoad,
An avel a floura ho plev rodellek, 'laouena,
Hag ar balafenned en-dro deoc'h a c'hoari.
Evurus an hini a ev eus ho touster
A c'hell en e zivrec'h dere'hel ho korf karantezus
Ha pokat da vleunienn frondusat ho kenou ! »

« Ar gwent a sut en e fleüt o vonet gant e hent,
Ar c'hoadoù heglevus gant soñjoù souezhus
O tihuniñ en o emskiant.
Karout a ran an inizi marmor e morioù ar c'hreisteiz,
An inizi kollet en aour ruz ar c'hornôg,
Kement burzhud ha kement hud,
En deus klasket en den e dizhout evit disamm e zienez :
Labous ar wirionez, dour ar vuhez,
Liorzh an aouravalou,
Ar c'hoant ac'hanoc'h am broud ! »

« Menezioù breudeur, betek en tu-hont d'an dremmwel,
Stardet an eil ouzh egile
Evel deñved un tropell
A vez bleniet gant ur mesaer sioul ha meurdezus. »

Ha pardonet e vin ma roan kement a blas da berson kozh Louaneg ? Gwerzennoù re dalvoudus, re stummet evit mont hebioù dezhe. « Skañvderioù evn ho korfoù gwevn « ... « Garm ha stourm ! » hag a voe e c'her-stur...

« Arc'hoazh...
Â, pegoulz e teui en-dro, â Froudenn, â Zudi !
Da zihuniñ va flamm marv,
Ha lakaat da dremen c'hoazh em blev
Douster da vizied hir ha bliv.
An tantad bras ennon a zo aet da ludu
Evel an hini a lezer en noz du
E beg ar run da vervel goude ar gouel,
Pa 'z a war-raok ar yaouankiz vagol goude gorollin,
Ha ne glever ken, eus a bell, nemet c'hoarzhoù damvouget.
Em empenn goullo ne dremen ken
Nemet soñjoù kleuz, a-steudoù.
Sed diwezh an devezh ;
Sed an eur faezh
Ma lazher er greuzeul ar gouloù. »

Met daoust d'ar barzh bezañ aet faezh ec'h embann ken sklaer all :

« Pezh a glaskan diraez n'eo ket hepken
diavaezoù ar furm,
Pezh a ziskleir kleuzlavarded arz kreisteiz ;
Evidomp ez eus c'hoazh en tu-hont d'ar gont-se,
Pa n'omp ket bet ganet war glannoù an difiñv.
Ne c'houllan ket hepken ar meizadoù sec'h-krin
Relegoù gwerniset, divuhez, ur mirdi,
Ma labour d'o fichañ prederourien ar pouf
Oc'h ober fae ouzh ar fetis. »

Ha n'eus ket aze eus un testamant speredel, un testamant a-berzh ur Gwalarnad engouestlet el lennegezh, engouestlet en dalvoudegezh ha ster al lennegezh ? Ster hon lennegezh...

Beaj ha garm, emezañ. Ret merdeñ a-dreuz hag a-hed hon egor da gompren an egor da vat. Ar garm azoniad hon stourm. Spered hon bro.

Lenn hag adlenn barzhoniezh Maodez Glanndour...

Herve Bihan

Levrlennadur

Gwalarn, Niv. 131, Kerzu 1940, p. 86.

Sterenn, da pellgargañ amañ (12 niverenn ar bloaz kentañ) :

<https://bibliotheque.idbe.bzh/serie.php?nom=Sterenn&l=fr>

Sterenn [niverenn 13] : Lan Devenneg, Troniennou ha kaniennou-mor – Studiaden
douarstummadouriezh, Skridoù Breizh, 1943.